


Klavad


KANAOUEN AR VRAN




Eun de - vez, mes-trez Bran war eur we - zen klu-



det A zal-che en he beg eur gram-poe - zen lar-




det: A - la - nig al Lou - arn ar c'houez-se pa zan - tas, E-



vel eun tou-el - ler d'e - zi a la - va - ras: War an ton



tra tra la la War an ton tra tra la la War



an ton tra-de - ri - de - ra Ha tra la la!

— Deiz-mat d'eoc'h, mestrez Bran, penaos ez it ganti ?

— E leal, mestr Louarn, brao 'walc'h oun, ha c'houi ?

Va bugale ive, nemet an diveza

Eo a zo gant an dreo, pemzek dez zo brema.

War an ton...

— O pegen kaer oc'h-hu gant ho sae zu impriz !

C'houi hoc'h eus sur lakeat he ober e Pariz...

— O ya, eme ar Vran, 'vel eur gageterez

A rofe da anaout d'it he c'hemenerez.

War an ton...

— E fei, mar deo ho mouez henvel ouz ho tilhad,

C'houi a zo en tu-all d'an holl ganerien vat .

Grit d'eomp eta klevet ho mouez ker manifik,

Rak ebarz ho familh oc'h krenv war ar muzik...

War an ton...

— 2 —

Rak-tal an intron Bran, hep beza re bedet,
 A c'hrosmol dre he fri an *Tour dantelezet* ;
 Dre ma ranke he beg digeri da gana,
 Ar grampoezen d'an douar zo lezet da goueza.

War an ton...

Alanig-al-Louarn a gonte mat war ze
 Ha war ar grampoezen e sailhas prim neuze ;
 Evel eun tort e c'hoarz an tamm mastin fripon,
 En eur frota e gof ha laouen e galon.

War an ton...

Trei a ra oc'h ar Vran, hag e lavar d'ezi,
 O tont d'he c'haketal, d'ober gwap anezi :
 — M' em eus ho paket brao. vil ez eo ho tilhad ;
 C'houi n'ouzoc'h ket kana, mez ho krampoez zo mat !

War an ton...

Neuze an intron Bran a zo *gwaleüruzez*,
 A zo dipitet oll, konfontet gant ar vez :
 — O perak e teuer an duel da zifen ?
 M'em bije da lazet gant eun tenn pistolen...

War an ton...

An holl lapoused-all o klevet koms diouzin
 A deuy d'am c'haketal betek dindan va min ;
 Mestrez an holl vrini paket gant Alanig
 Ne vo muioc'h doujet 'vit eul laouenanig !...

War an ton...

Klevit brema 'r gentel eus ar c'houblajou-ma ;
 Brini bras ha bihan, am selaouit brema :
 Pa vo leun ho kenou gant ar c'hrampoez lardet
 Serrit ervad ho peg m'ho ped ne ganit ket !

War an ton...

Dastumet ha reizet gant
 KLAODA 'R PRAT.



KANAOUEN AR SKOLAER

D'am skolaerien a Landi.

Me zo eur skol-aer yaou-ank di - boell ha c'hoar-ri-
 er, D'ar stu - di ez an bem - dez ouz va c'hein ar
Diskan
 zac'h ler. Me ya en - dro di - zour - si bras ha
 dinec'h; Me ya en - dro di - zour - si bras ha
 dinec'h, A - to!

Abredik diouz ar mintin, da zeis heur pe war-dro,
 E teu va mamm da hopal : « Alo, Yannig, var zao ! »

Siouaz ! dre bep seurt amzer, dre ar glao hag an erc'h,
 Me a rank bale d'illo, hep goulenn va dilerc'h.

Pa 'z an en hent d'an hanvou, me glev an alc'houeder,
 Hag e kanan eveltan meuleudi d'am C'hrouer.

A-wechou ken dizeblant, pa vez an heol o tomma,
 E tigouez ganen dale er c'hoad da neizeta.

N'em eus ket a horolaj, ha n'ouzoun heur ebet,
 Rak-se 'vezan divezat, ha... siouaz ! kastizet.

Er goanv, war al lenn skornet, en eur vont d'ar skolik,
 Me gar ober a-zoare pennadoù riklaik.



— 4 —

Na diegi 'meus goude kregi em leoriou studi,
Me hen lavar gant glac'har, ze n'eo ket eun dudi ! . . .

Koulskoude eo red poania, va mamm a lavar mad,
Evit ma vezin eun deiz gwiziek evel va zad.

Kablus e ven o tamall ar vistri 'deu d'am c'helen,
Rak ma kemeront preder, evit va mad hepken.

Poan ebet na espernont eus ar mintin d'an noz
Da zeski d'in ar skiant hag hent ar baradoz.

Em c'halonig a vugel da viken e chomo
Karantez, anaoudegez, ha doujans evito.

O lezel ar ganaouen, deomp adarre d'al labour,
Magadur ar sperejou, gwir danvez ar re baour.

KLAODA.